

Dastumad Pennwern : dornskrid 89

53. FIO CHAFFRE

(folленнou 173 - 175)

Pa voan e vond d'an offeren bred
 Me ne chonjen en droug e bet.

Me o rankontr eun aer viber ag eun toussek,
 eun aer viber hag hi sparlet,
 eun den chentil kaer habillet.

Ar reze lavare dime :
 Fio Chaffre, lac'h ta vugale,
 Lac'h ta c'hreg a ta vugale
 Neuze vi libroc'h da vale.

e iemp on daou da normandi
 evid delc'hel hostalliri.
 Braowa daou zen iaouank e vezimp hen !

Ar galon d'ho laza nem be ket
 eur garante vrás a meus oute
 hag oc'h ho mam, balamour d'he.

Special va merc'h henan
 a zo evel ouzin a kredan

Pa erruas Fio Chaffre en ti
 e voa e c'hreg o tijuni.

o tijunia en tall an tan
 hag o reï iod de map bian.

hag en en avis farsall outi
 a roas daou toll gontel dezi.

- Fio Chaffre mar n'em c'herret
evid var ar plass nam lazet ket

Ken am bezo komzet doc'h belek.
- Oc'h belek te ne komsi ket

Ganez te me a ve diskuillet.

Me lavaro e troha kid° divar ar skabel °(ize
e vezin kouet var va kontel. kieg

Fio Chaffre vel ma c'hlevas
e mes an ti a sortias
An ent dar bourg en a klaskas.

- Nag otrou kure me ho ped
Da zond ganen da noui va greg.

- Petra zo gant ta greg erruet
en offern mintin mem boa hi goëlet
hag hi e kreis he joaustet

An otrou kure a c'houlene
en ti evel ma entree :

- Petra zo ganes-te erruet
en offern vintin mem boa ta vellet,
A te e kreïs ta joaustet.

- e troha kig divar va skabel
on bet kouet var va chontel.
Ed eo enon peteck meravel.

An otrou kure a c'houlenne
Doc'h ar bugale eun deïs a voë :

- Bugaligou, dime leveret
Petra zo gant ho mam arruet?

eur c'hrouadur a voa en ti
en oad a zaou vis pe a dri.

A dre permission Doue
Neus diskleriet ar virione

- Pa arruas va zad ebars an ti
e voa om mam e tijuni.

- 143 -

e tijunia en tall an tan
hag e reï iod de mab bian.

hag en en avis farsall outi
e roas daou toll kontel dizi.

- Fio Chaffre petra c'heus gret
Ar groug a c'heus te meritet.

Fio Chaffre vel ma c'hlevas
E mes an ti a sortias
er vas huela ar skeul e pignas

- Mar deus den aze deus a paros prat,
Savit he zorn eun dra benag

Ma roïn dezan eur mouchouer
Vo varnean tri berad goad
Da kass dam bugale dar ger
Mo devo chonch deus maro ho zad.
A kassit-hi da klasq ho bouet
evid ma lavaro ar merc'hed :

- Ar re man zo bugale a skoer vad
Zo lazet ho mam krouget ho zad.

VVVVVVVV

Jannet Puill 14 janv. 1851

VVVVVVVVVVVVVVVVVV